



**Aotreegezh
Skiantoù
an Deskadurezh**

**Hentad Rakstummañ Skolaerien
(HRS)
Divyezhek brezhoneg – galleg**

C'hoant ho pefe da vont da skolaer ?
Dibabit un aotreegezh gant un hentad rakstummañ gouestlet a-ratozh

Gant an **hentad rakstummañ skolaerien** (HRS) divyezhek brezhoneg – galleg vez heuliet a-bep-eil kentelioù el lise hag er skol-veur.

Diouzh un tu e vez kreñvaet ho teskadurezh hollek hag ho kouiziegezhioù en danvezioù a ranker mestroniañ evit dont da vezañ **skolaer divyezhek**, ha diouzh un tu all, e vez heuliet un aotreegezh Skiantoù an Deskadurezh.

Er bloavezh kentañ (L1) hag en eil (L2) e tizoloer ar vicher en ur heuliañ **stajoù arsellet hag ober ambrouget** e klasoù divyezhek.

En trede bloavezh (L3) zoken, ez eer da zizoleiñ ar c'helenn en ur vro all e-pad ur **staj etrevroadel**.

Da heul an aotreegezh e c'heller kenderc'hel gant ur **master MEEF meneg kentañ derez divyezhek brezhoneg – galleg** evit echuiñ ho stummadur ha tremen ar genstrivadeg kelenner.ez ar skolioù.

An **HRS brezhoneg** a vez kinniget e Brest (Kevrenn Skiantoù ar Sport hag an Deskadurezh an UBO ha Lise an Hirwazh)

Pal an hentad eo rakstummañ studierien evit mont war-zu ar vicher skolaer e **klasoù divyezhek**.

Digor eo d'an holl liseidi, pa vefent divyezhek dija pe unyezhek.

Gant an HRS e taper un **aotreegezh Skiantoù an Deskadurezh** e fin an tri bloaz.

An HRS e sifroù


Dasparzh ar c'hentelioù

■ Kentelioù er skol-veur
■ Kentelioù el lise

Ur sizhunvezh e L1

Ur sizhunvezh e L2

Ur sizhunvezh e L3



E L1 hag e L2

28 sizhunvezh kentel ar bloaz + 3 sizhunvezh stag er skolioù
= 31 sizhunvezh

E L3

27 sizhunvezh kentel ar bloaz + 4 sizhunvezh en estrenvro
= 31 sizhunvezh